

Ar vilaine

Vi am eus choajet ur vestrez
Ur vrav a verc'h ur vinourez, a vrav a verc'h ur vinourez

Ha karaïn ur vilaine laret zou ret paotred, o i ya
He c'harain a zou ret
Ha karaïn ur vilaine laret zo ret paotred, o i ya
He c'harain n'h'llen ket

Hag he c'hozh kouef oa iar e fenn,
Oa hache rac'h get ar vurmenn

He c'hoazh hiviz oa iar he c'hrouc'henn
Oe goloet rac'h get ar c'haoc'h c'hwenn

Bez oe getei ur c'hozh dantér
Oa hache rac'h g'ar gwall amzér

Ur c'hozh lavreg zou iar he revr
N'en deus namet toullou-taler

Ur troc'had fank zou iar he divc'har
Hag just ken tiv hag ur rod-karr

He c'hozh voteù zou en he zreid
N'en deus na 'dan na sol na lein